



Gwazi meur

Fichenn savet gant Guylaine Sergent

Piv

Bugale adalek 8 vloaz

Pelec'h

E-barzh pe er maez hervez an amzer

Dafar

- Ur bladenn c'hoari
- Un diñs
- Ur pezh evit pep skipailh
- Paperioù gant goulennoù, hag un niver war pep hini.

Prientiñ

- Fardit ur bladenn c'hoari gwazi (*jeu de l'oie*) war ur c'hartoñs bras, gant tro dro 45 karrezad warni.

- Tresit warni karrezadoù gant niveroù e-barzh, ur pemp gwazi bennak hag un dek bennak gant traoù ispisial.

Gortoz > gortoz un pe zaou pe bemp tro a-raok c'hoari

Adkregiñ > Bannañ an diñs en-dro

Kilañ > Bannañ an diñs evit kilañ

(Tu a zo da lakaat karrezadoù e-giz > Tremen 5 gwech e dro e fin ar c'hoari, reiñ a raio tro d'ar skipailh gant dale adpakout anezhañ)

- Savit ur goulenn evit pep karrezad, lakit un niver warno, ha stagit anezho e pep lerc'h tro-dro.

Mont en-dro ar c'hoari

- Ober skipailhoù, div pe muioc'h, met da ziwall a zo, peogwir e c'hell bezañ diaes da verañ gant re a skipailhoù (d'am soñj arabat ober muioc'h eget pevar).

- Divizout urzh kregiñ ar skipailhoù (da skouer ar skipailh a ra ar sifr brasañ gant an diñs, an hini vihanañ...)

- Ret eo d'ar skipailh kentañ bannañ an diñs ha mont war-raok deus an niver a garrezad merket warnañ, diouzhtu e krog da glask an tamm paper-se e-keit ma vez bannet an diñs gant ar skipailh all...

- Evit bannañ en-dro an diñs eo ret d'ar skipailh a-bezh reiñ ar respont mat. Mard eo fall ar respont pe e chom bout ar skipailh, e vo ret dezhi bannañ an diñs met evit kilañ.